

20

BADISIANT

Ma Fillor Ervoan HERNOT vihan,

AR 15 A VAE 1889.

Eunn devez a joa adarre
A c'heuz roet d'in, ma Doue,
Pa welan n'euz ma mab Ervoan,
Digant Doue eur mab bihan.

Hep mar Ervoan eo he hano
Eunn hano kaer ma zo er vro.
Fillor ann Aotro Sant Ervoan,
N'euz eur patròn hag a garan.

He dad, he daou dad koz ive,
Azo Ervoan, dre c'hraz Doue
Ar bugellik, dre ma kresko,
A reio enor d'he hano.

Digant Doue nefo graso,
Da zavel kroajo dre ar vro,
Seulvui a vefont diskaret,
Stankoc'h a ze voïnt adsavet.

Eunn dra c'hoaz a m'euz da c'houlen,
Ra vo bepret fur ha kristen !
Ra garo he vamm hag he dad !
Enn dro d'ezhan ma rei skwer vad !

Ma rei labour d'an artizan !
Ma servijo Doue hep doan,
Aluzen ma rei d'ar bevien
Kalz pe neubeut deuz he voïen.

101
Digant Doue c'houlan eun dra,
Pa rei Ervoan he bask kenta
Ma vo Pæronn ha mæronnez
Tad hæ mamm goz en levezez!

Aotro Sant Ervoan binniget,
Ho fillorik ra diwalfet !
Dre ho sikour ha graz Doue
Ra nefe ment eur sant, euna deiz !

ERVOAN HERNOT,

Kizeller en Lann-Huon ha marc'hek
breuriez St-Gregoar.

Lann-Huon, a 19 a vae, deiz chouël Sant Ervoan.